


imbourenh



N i v e r e n n 58

30 Du 1974

I M B O U R C ' H , K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Pempvet bloavezh

Niverenn 58

30 Du 1974

Raklavar..... p.339
Diellskrid diwar-benn ar bourevierezh er bed.....p.335
Gourfennskrid.....p.363

=====
Koumanant-bloaz : 35 lur. K.R.P. Y. Ollivier, 1 534 25
Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 5 lur

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud,
35 000 Roazhon. CPPP 50 015

K E M E N N

An niverenn-mañ deiziadet, eus an 30 a viz Du 1974 a zeu er-maez gant ur miz dale, evit darn en bag da ec'hwel ar postoù e-pad an diskar-amzer. Dleout reomp c'hoazh d'al lennerion un niverenn daouek evit koumanant 1974 ; houmañ a zeuy er-maez e-kerzh miz Genver 1975.

Adal niverenn gentañ 1975 e vo kemmet ment ar gelaouenn. Ne ouzomp ket c'hoazh ha degemer a raimp ar vent 29,7 km. e-lec'h 27 km. pe ur vent hanterek evel hini ar c'helaouennoù studi peurliesañ : ret eo gouzout koulskoude n'eo ket aes ober gant ar mentoù hanterek-se a zerefe a-walc'h ouzh ar benveg moulañ a implijomp. Evit ar poent, n'eus forzh penaos, e fell deomp echuiñ gant ar vent 27 km. evit ma vo tu da goublañ a-gevret ar bloavezhiañ 1974, daoust ma ne chom mui nemet paper dister er vent-se. E deroù 1975 avat e voulimp ar gelaouenn adarre war baper gwenn.

Anaoudek e vefemp eta ouzh al lennerion mar gallfent kas diwar vremañ o adkoumanant evit 1975. Ret eo bet kreskiñ un tammig gwerzh ar c'houmanant en abeg d'ar c'hresk a zo deuet war briz ar paper a zo daougementet, war-bouez nebeut, en ur ober un nebeut bloavezhioù. Spi hon eus e vo tu da virout ar priz-se evel m'emañ hogen evit se e ranko niver ar goumananterion kreskiñ a-walc'h er bloavezhioù-mañ evit kempouezañ koust ar mizoù.

=====

RAKLAVAR D'AR STUDIADENN DA HEUL

Graet hon eus hor soñj embann ar skrid a zo bet prientet gant Youenn TROAL a-zivout ar bourrevierezh diwar meur a arbenn.

Moarvat n'eo ket an destenn-mañ unan gwall vourrus ; lakaat a ra anat gouezoni mab-den hag an dra-se a zo doanius bepred da wiriañ (1). En em c'houlennet on ivez ha talvezout a rae ar boan reiñ brud da vunudoù rukunus ha na c'helljent nemet broudañ ranellder diyac'hus hiniennoù hep o degas, a-hend-all, da stourm a-enep d'ar walenn. Ar goulenn-se am boa graet din ivez, d'ar mare ma oa bet diskuliet ar bourrevierezh e Norzh Iwerzhon hag en Euskadi e 1969-1970. da genver prosez Burgos. D'ar c'houlz-se e oa bet skignet traktoù ha skridennoù skeudennaouet a-wechoù diwar-benn doareoù-ober jahinerion ar renad hollveliek e Madrid. Ne blije ket din kennebeut neuze an implij politikel a oa tennet eus torfedoù kerreizhoù stadoù mac'hom zo. O lenn al lizheradur a vez moulet gant strolladoù ha kostezennoù zo e kredfe unan ne vez bourreviet an dud nemet dindan renadoù zo, kilstourmelour ha dehouelour nemetken. Moarvat e c'heller gwiriañ e par ar bourrevierezh dindan renadoù politikel warlerc'hiet ha kozh hogen ivez dindan ar renadoù araogelour nevez diazezet en dekvedoù diwezhañ da heul un dispac'h awenet a-wechoù gant ar varksouriezh hag ambilhet, a-hervez, gant ur strollad, -- un unstrollad, ne vern penaos, - gwerinelour.

D'am soñj ez eo diaes tre lakaat ar dud hag ar stourmerion bolitikel da zisteurel a-grenn keal ar bourrevierezh. Pe neuze ez eo untuek ar stourmerion-se ha ne gen-daonont nemet jahinerezh o enebourion (arabat eo reiñ armoù da

(1) Kenegiñ a ran, e ser se, ur studiadenn bet moulet hevlene, - ma ne fazian ket -er gelaouenn c'hall "Recherche" - e sigur ar galloud en doa. ne vern piv da vont da vourev en ur gwezhva bredoniezh eus ur Skol-veur bennak eus ar Stadoù-Unanet. Diskouez a rae ar studiadennoù hag arnodadoù bet sevenet er gwezhva - se ez eo prest nep piv bennak da ran oberoù feuls - evel ar jahinerezh adal maz eo goloet e giriegezh gant un atebeg lec'hiet a-us dezhañ en urzhaz ar gevredigezh.

enebourion an Dispac'h, 'keta!) hag an dra-se a c'hoarvez e-touez izili ar c'hostezennoù kleizat. Re neuze e tavont penn-da-benn diwar e benn, o klask a-wechoù zoken e zigareziñ en anv an efedusted pe en anv difenn an Urzh ; hag hemañ eo emzalc'h an dehouidi, dre vras, (kv. arguzadurioù ar glevgadour gall kassu). En arbenn a se, ivez, end-eeun, eo e teu ar stourm a-enep d'ar bourrevierezh da vezañ un arm etre daouarn ar "gleizourion" dre vras. Azonus eo, a-hend-all, an emzalc'hoù-se eus ar c'hostezennoù kleizat ha dehouat eus tro-spered ar c'hostezennoù-se er vuhez politikel, merk-diforc'hañ ar c'hostezennoù kleizat o vezañ ur wellwelouriezh pilpouz a-walc'h hag hini ar c'hostezennoù dehouat o vezañ ur wazhwelouriezh 'konek' (1), hag, ivez, ret eo lavarout, un diegi spered eston a zo si kefredel gwashañ ar vrizh hengounelourion dre vras.

Hogen fellout a ra din distreiñ war ar c'hrafoù emac'h o paouez menegiñ hag ensellout a rin da gentañ saviad stourmerion ar gostezenn gleiz. Lavaret em eus e c'helled tamall d'ar re-se un doare pilpouzerezh. Daou arvez a zo d'ar pilpouzerezh-se e gwirionez. Diouzh un tu, eta, ne ziskuilh ket ar stourmerion-se ar bourrevierezh er stadoù sokialour pe araogelour (peseurt renad, avat, a zo muioc'h 'mirelour' eget hini ar riezoù m'eo diazezet enno beli an dispac'h abaoe ur pennad amzer ; anat eo ez 'diasavel' pep renad dispac'hel 'diazezet', evel e Mec'hiko, da skouer, zoken pa ra van da gas war-raok un dispac'h peurbadus evel e Sina), fadal ez eus testenioù a-walc'h o tiskouez pe ez eo bet arveret nevez zo pe e vez arveret c'hoazh bremañ ar bourrevierezh ken e Kuba pe en Albania. Ken e broioù araogelour reter Europa, lakaomp, a-enep da "enebourion an Dispac'h" pe an dud tremenet da enebourion an Dispac'h. Ha, diouzh un tu all, e nac'h ivez stourmerion an Dispac'h anzav ez eo kenstag feulster pe, da vihanañ, sponterezh hiniennel ha jahinerezh. Ober a reont van da c'houlenn groñs

(1) "cynique".

digant o enebourion ur vertuz ha na vefent na mennet na gouest da bleustrîñ o unan m'en em gavfent e lec'h ar re-se. Ar sponterezh - dre sponterezh ez intentan ur feulster sevenet gant hiniennoù, goude ma ve diwar urzh ur stroll bennak, a-enep da hiniennoù all perzhiek pe diberzh en emgann - ne c'hell nemet atizañ ar gasoni hag a zevoud dre se ur feulster all a zo, dres, ar bourrevierezh. Gwir eo e teuomp tre amañ en ur c'helc'h bac'h rak ar sponterezh a zo, ivez, frouezh ar jahinerezh, intrudu ar feulster o vezañ gant ar galloud rak pep galloud a zo feulster dre natur ; hogen ret eo gouzout e teu dispac'herion zo a-ratozh er c'helc'h-bac'h hon eus meneget gant ar mennad da grouiñ ur c'hendazwered etre an emsaverzh-gwaskerezh-emsaverzh, an eil o vezañ ganet eus egile, hag o ledañ an dispac'h a-benn ar fin. Stadañ a ran-ker evelkent n'o deus ket an dispac'herion (pe an dreizhourion, nemetken) bepred intrudu ar feulster ; e Brazil, da skouer, n'eus kroget gouvrezel ebet gant eneberion ar renad diazezet. Fezh a fell din reiñ da gompren ez eo kement-mañ : ne c'hell ket un emsav dispac'hel amparet gant kristenion chom hep dremmañ ouzh heuliadoù un obererezh feuls bennak. Pismiget a-walc'h eo bet Flaid Cymru en abeg d'e beoc'helouriezh. Ne fell ket din amañ barn ar beoc'helouriezh-se evel kaderezh politikel ; lavarout hepken a ran ez eo pilpouz a-walc'h tamall ar bourrevierezh hep bezañ sklaeraet, da gentañ, kudenn ar feulster dre vras. Le 'oar e hañval bezañ dic'hallus tizhout ur pal dispac'hel e berr amzer hep ober gant ar feulster ; hag aes e vefe ober ar roll eus an emsavioù ha n'o deus kemeret ar galloud nemet war-bouez implijout ar gwall-nerzh. Kompren a ran eta e ve dedennet stourmerion zo gant an hent-se ; hogen gouzout a rank ar re-se ez eo liammet strizh kenañ ar feulster hag ar bourrevierezh adal ma reer gant ar sponterezh (1). Dav eo dezho diwall mat a-barzh divizout ober

(1) Ar brezel a c'houlaka lezennoù zo gant ar re a gemer perzh ennañ ; e devoud avat ez eo awenet al lezennoù-se gant an aon rak an talv-gwall nemetken.

gant ar feulster ha na eav e reizhabeg nemet en arnodreizh-
iadek ar galloud da zistrujañ o emsav.

Da tle an dispac'herion eta diwall mat da zont
tre e kelc'h-bac'h ar feulster hag ar sponterezh e tlefe dalc'h-
idi an urzh gouzout ez int paket kalz gwashoc'h c'hoazh eget
o enebourion o unan er c'helc'h-bac'h-se. Flegañ d'ar gasoni
ne reont ken o jahinañ o enebourion (plediñ a rin pelloc'h
gant arvez sadek ar jahinerezh a garfe bezañ kalvezel ha
milourel, a-hervez). Da gentañ, dister tre eo efedusted
seurt doareoù-ober. Kerreizh ebet, betek henn, n'eo deuet a-benn
da zistrujañ framm dirgel ebet war-bouez implijout ar bourrev-
ierezh : bihan eo bepred ar c'hementad a ditouroù a c'hell
reiñ nep prizoniad. War ar marc'had e tevoud ar bourrevierezh
ur gasoni diheskus e-touez ar stroll a zo gwasket gant ar
reizhiad vac'hañ ; broudañ a ra an dispac'herion d'ar stourm
ha kreskiñ a ra nerzh an emsav a-benn ar fin ; se hon eus
meneget dija, rak an dibenn-se eo a zo klasket gant an
dispac'herion o unan ; da lavarout eo, kouezhañ a ra ar galloud,
neuze, en traped a zo stignet gant e enebourion end-eeun.
Erfin, e dislavar emañ pleustrerezh ar jahinerezh gant lez-
enn-diazez stadoù zo ; dre se emañ war var da vreinañ ar
stadoù-se dre an diabarzh ha da lemel o reizhveliezh diganto ;
en diwezh holl e c'hell ar jahinerezh distrujañ ur renad.
N'eus forzh penaos, ur stad ha na sent mui ouzh ul lezenn
vuhezel bennak a zistaol, dre se, diazez he reizhwir (1).

Ar wirionez-se, moarvat, n'eo ket anat bepred
d'ar re a zalc'h ar galloud. Difur eo koulskoude, - se hon eus
meneget endev - d'ur stad hepkoriñ ul lezenn vuhezel, goude
ma vije prest an emsavioù - a zo un danvez galloud - da hep-
koriñ ivez hevelep lezenn. E devoud avat ez eo bet kollet en

(1) Dre se e vefe furc'h d'ar galloud diazezet anzav ouzh ar
soudarded politikel un dezvad par d'an hini a warez soudarded
ar stadoù diazezet o unan, se a c'hoarvez er pleustr nemet adal
ma vez kresket an emsav d'ur vent zo.

hon amzer ar c'heal a reihhveliegezh hag a reizhwirievegezh. Steuziet eo pep diazez nevet d'ar veliezh daoust ma klask pep galloud adsevel ha korvoiñ evitañ e unan ar c'heal-se. Eus an ezvezañs-se e teu arlouperezh ar brezelioù diabarzh a vremañ ha ned eo ar sponterezh hag ar jahinerezh nemet un arvez anezhañ. Ouzh ar gwallzevoud-mañ e rankomp talañ hiziv hep keuziañ d'ar renadoù kozh ha na raent nemet korvoiñ hep mezh ebet keal kravezel ar veliezh evit o mad-int o unan. Ar re-se eo o deus didalvoudekaet keal ar reizhveliezh, dre ma ne oant ket dellezek da embreger ar galloud a skrapent evito o unan. Hogen houmañ a zo c'hoazh ur gudenn all. Lavarout a raimp hepken eta ez eo bet kammgemeret ha kammarveret gant ar galloud en Europa ar c'heal a reizhveliezh a gave he sichenn e kefridi an Iliz. Hiziv an deiz e klasker adsevel ar c'heal-se war gont ar strolladoù dispac'hel a garfe adstummañ an denelezh. Hogen hep dave da Beurvoud na da dalvoud trehontel ebet ne c'hell ar mennad-se nemet disoc'hañ d'ur mac'homerezh gwashoc'h eget ar re gent, ha c'hwitañ. Hogen re bell ez afen ganti ma fellfe din arsellout ar gudenn-mañ adarre.

A-raok klozañ evelkent e karfen pouezañ war un arvez eus ar bourrevierezh a zo bet meneget gant Youenn Troal hag a zo an hudurniezh pe an diaoulegezh anezhañ. Boaz ez eur en hon amzer da ziskar an "tabou" en ur lakaat da "dabou" kement reolenn a zirenk bondougoù natur an eil pe egile, e gemplezhoù e gwirionez a-wechoù. Eus ar stourm a-enep d'an "tabou" e tiver an dirollerezh kefredel en em ziskouez er romantoù pe er filmoù - erotek, a-hervez - a fell dezho diguzhat kement daspleg dirgel zo e bred mab-den, e-giz pa vije ar bondougoù-se diouzh natur orin ha gwirion mab-den, ret holl o gwalc'hañ evit degas ar eurvad dezhañ, hep derc'hel kont nag eus bredyec'hed nag eus reizhded. N'eus mar ebet avat ez eo stag ar frankiz revel klok - a dalvez distagañ a-grenn an orged diouzh ar genel pe ar garantez - ouzh an hudurniezh a c'hoarvez eus perc'hennañ ar c'horfoù. Ne c'heller ket avat perc'hennañ ar c'horfoù hep piaouañ war un dro an eneoù.

Hag hemañ, dres, ez eo arbenn kentañ ar jahiner : perc'hennañ ar c'horfoù evit o distrujañ ha reiñ dezhañ dre se ur galloud doueel. Gwelout mat a reer hed eo ar politikerezh pe ar brezel, en diwezh holl, nemet un digarez d'ar bourrevier hag, ivez, ne c'heller stourm a-enep da walenn ar jahinerezh hep dont tre e bed an talvoudoù kravezel. Fell omp e gwirionez diouzh ar goulzelouriezh a lusk stourmerion zo da implijout a-du gant o mennadoù politikel rakvarnioù buhezel ha speredel ha na gredont ket enno zoken.

=====

NOTENN DIBENN

Un nebeut evezhiadennoù a fell din stagañ ouzh ar raklavar-mañ. Kavout a ra din ez eo bet ar bourrevierezh degemeret evel un hentenn-enklask gant barnerezh ar renadoù kent a embanne bezañ kristen - kemeromp hini ar roue gall Loeiz XIV er XVIIvet kantved, unan eus an arouezioù a ziskouez ne oa tamm gwirionded ebet gant ar re-se oc'h embann o feiz kristen. Moarvat o devoa atebieion ar gwallvoazerezh-se koustiañs fall ouzh henn ober rak nac'het o deus bepred e reizhekaat (barnerion zo o doa goulennet e ve "unvanet" an doareoù-bourreviañ diouzh lezenn er rouantelezh penna-da-benn evit ma vije reoliekoc'h ar barnerezh dre ar vro!) Re a vezh o doa ar varnerion evelkent evit asantiñ da zizoleiñ dirak ar foran o hentennoù-'goulennata'. Kement-se holl a ziskouez ne oa ket muioc'h a sevenadur kristen en amzer-se eget bremañ daoust ma treistpade ur stuzegezh kristen er yoc'h dizek ha dibolitikel, hag ivez e-barzh kelc'hiadurioù zo e kêr. Se a zo a-bouez da c'houzout rak an diouer-se a "sevenadur" kristen politikel a ziskleir perak emañ ar gristeniezh o tizeriañ hag o vont da get hiziv an deiz.

.....

DI ELLSKRID

DI WAR - BENN

AR BOUPEVIEREZH ER BED

kempennet ha skridaozet

gant

Youenn TROAL
=====

Un tamm istor...

Sellet eo ar bourevierezh gant ar C'hesianed evel ur mac'h-agn evit an den ha mat nemetken evit an istud m'eo ar sklavourien hag an estrenion. Heñvel-poch evit ar Romaned. Evelato, pa gresko niver ar geodedourion roman, ne vo ket espernet an dud dieub hag ar bourevierezh a c'hallo kouezhañ kenkouls war an testoù, war an damallerion ha war an damallidi.

E-doug ar Grenn-Amzer Uhelañ, ez eur boazet da voureviañ. Koulskoude, e Kornog Europa, n'eus mui anv eus boureviadur e-barzh ar gwir, nemet e Spagn, e-lec'h ma pad al Lez-Enklask Meur Roman. A-enep emañ an Iliz. E 866, n'en deus ket ar Pab Nikolaz II damant da ziskleriañ da roue Bulgariz : "Ma koll unan bennak e nerzh o herzel ouzh ar bourevierezh ha ma anzav bezañ kiriek, ha n'eo ket, piv 'ta a ra ar falloni ma n'eo ket an hini a zo ouzh e rediañ da ober anzavioù gaouiek."

Met gant adnevezadur ar Gwir Roman, e-kerz an XIII vet kantved, e teu adarre ar bourevierezh war-c'horre ha se evit kaout ar prouennoù, lodenn bouezus eus ar galadur-kospañ(1) (1)"procédure pénale" . Aotreet eo an implij anezhañ gant siellekrid ("Bulle") 1252, a-enep d'an disivouderion e oa klask warno gant al Lez-Enklask. E Kornog Europa, nemet e Bro-Saoz, eo degemeret ar c'hrisañ stummoù-bouevierezh. Ret eo kaout prouennoù kredus ma gwirheñvel, a-benn ma ne vefe ket gwasket e gorf d'an tamallad. E Bro-C'hall, e klasker reolenniñ bevenniñ : Ar roue, e 1498 hag e 1519, ar Breudoù e-kerzh ar XVII vet kantved. Ne oa ket tu da lakaat ar "goulenn dreistordinal" (question extraordinaire), da vont en-dro, nemet goude ur varnedigezh a-ratozh evit se. Ha c'hoazh, e c'halle ober galv. Berzet e oa "goulenn" a-nevez, keit ha ma ne veze ket dizoloet arroudennoù nevez. Anzavioù distaolet e-doug an dalc'h-bourreviañ a zlee bezañ dalc'het dezho, en diavaez anezhi. Ma c'hoarvezed dinac'hañ, e oa ar gwir da adkregiñ gant ar "goulenn". Urzh a zo koulskoude da dommañ ar salioù! Mezeged ha surjianed a ra war-dro an tamallad. Gant ar Breudoù emañ ar veliezh da lakaat ar muzul war ar stummoù da "c'houlenn", evit herzel ouzh faltaziennoù diroll ar vourrevion.

Er XVIvet ez eo taget el Lez-Enklask gant meur a Jezuzad. Diouzh o zu, protestanted zo evel Grevius ha Bekker a gondaon ar bourevierezh. Barnerion a sko ivez d'o zro, evel m'en doa graet Montaigne en e ESSAIS. En XVIIIvet kantved, dreist-holl, e kouezh an taolioù ar startañ a-berzh Beccaria, Montesquieu ha Voltaire, hag e 1788, eo torret ar gwir da arverañ ar boureviadur. A-ziaraok e oa bet dilamet e Sveden (1734 ha 1772,) e Prusia (1740), e Toskana (1786).

Dre c'hrad ar paourkæzh Loeiz XVI eta e oa bet graet ar c'hammed bras-se war hent ar reiñded, en despet da enebadurioù ar "stroloù ensavet" (corps constitués), ar varnerion dreist-holl. E-pad ur c'hantved bennak, ne gredo ket ar bourevierezh diskouez a-wel d'an holl e zremm diaoulek, da vihanañ er broioù sevenaet.

E sigur an daou vrezel-bed, ez eo en em ziskoachet en-dro da gentañ dre laer, goude an deiz anat, kafune gant dislavaroù pilpouz, pilpouserezh, gevier, berrboell hag en diwezh gant gwiriekadurioù dizampart. Morse na vo gallet meizañ da vat pebezh gloar a zo bet skoet gant speredoù an dud diwar an daou vrezel-se mar eo klañvet ganto emskiant donañ ar bobloù. Hiziv an deiz, ez a ar bourevierezh en-dro ha mat zoken. Bro-Saoz end-eeun, unan eus ar broadoù bras diwezhañ chomet betek-henn hep e arveriñ, a vez bremañ bourevierezh ganti en Iwerzhon, da enebiñ ouzh ar gouvrezel kêrel. Ur walenn gevredigezhel eo deuet da vezañ, oc'h en em ledañ dibaouez, oc'h en em silañ betek e mel-eskern hor sevenadur.

Petra eo ar bourevierezh ?

Ur boan feuls-meurbet graet da gorf un den, en despet dezhañ. Tri amkan a zo dezhañ :

1. Kastiz ur c'hirieg.
2. Enklask war ur brouenn.
3. Enklask war un titour.

I. Kastiz ur c'hirieg. Dre vras, eo kavet fall ar bourevierezh, pa vez arveret evit se. D'an ampoent, ya, ez eo kondaonet. Met n'eus ket bet soñjet bepred e giz-se. En ur waskañ un den kablus gant ur c'hastiz kriz, e veze klasket reiñ ur skouer saouzanus. Dibabet e veze ar gwana-dur hervez ar pezh ma oa bet an torfed. El lodenn vrasañ eus ar broioù, ez eur bet techet diehan da souplaat ar boan a varv. Hag houmañ a ya da get, nebeut-ha-nebeut, dre-holl, a-dreuz ar bed.

2 Enklask war ur brouenn.

3 Enklask war un titour. Boureviet e vez dreist-holl, evit di-wall an urzh e-barzh ur gevredigezh. Hag en abeg mirout un urzh diazezet lakaet en arvar, e vez gwanet korf an den d'e lakaet da gomz, hag evel-se, gouzout piv a fell dezho freuzañ an urzh diazezet ha gouzout penaos e venn henn ober.

** * *

Penaos e vourevier ?

Penaos e vourevier bremañ dre ar bed ? Ur pikol levr a vefe ret sevel evit displegañ, dre ar munud an holl zoareoù-boureviañ arveret gant mab-den abaoe maz eus anezhañ. Setu perak e vo a-walc'h gant lakaet war wel euzhusderioù bet sevenet e-doug amzerioù tost dimp pe sevenet d'an eur-mañ, war douar an dud. Ouzhpenn-se, n'eus ket tu, peurvuiañ, da zisrannañ ar bourreviadurioù-korf diouzh ar bourreviadurioù-spered.

Setu amañ un arridennad devoùoù mesk-ha-mesk:

- E Brazil, e dibenn 1969, eo toullbac'het Tereza. Da gentañ, eo diskouezet dezhi an holl ardivinkoù da voureviañ, ar penaos hag ar perak anezho. Ha diouzhtu, int bet arnodennet warni : taolioù, piñsadennoù, stokadennoù tredanel h.a. Ha da heul, c'hoarzh, goaperezh, kunujenerezh. Antronoz, a-boan ma c'hall he c'heneilez he anavezout, ken c'hwezhet maz eo he dremm : taolioù he deus bet war he c'horf a-bezh. Hag ivez c'hwec'h diskargadenn tredanel, c'hwec'h d'an nebeutañ, rak goude ar c'hwec'hvet. e oa semplet. Pouezañ a rae ar boliserion evit sachañ diganti anvioù tud a oa enouestlet en e c'hostezenn bolitikel.

Klasket en deus neuze ar polis trouz ouzh c'hoar Tereza, o tont en ti, ne vern pe eur eus an deiz, o furchal e kement kogn zo, o strewiñ pep tra du-mañ, du-hont. Ma n'eo ket bet bazhataet Jorj ha Mari-ar-Rozera, nizezed Tereza, ar plac'h yaouank evelato ez eus bet skourret dezhi orjalenoù tredanel ouzh he divronn. "Unan eus an traoù ar spontusañ, a lavare-hi". E-pad an noz, e rae gwallhuñvreoù diwar ar boan diwasket ganti ha ne c'halle ket disoñjal.

Manuel, mab henañ Maria, niz Tereza eta, a zo bet kaset gant ar boliserion da gaout Tereza ha rediet ganto da lopañ warni. Padal

ez eo eñ tost dezhi a galon, rak darempredoù strizh-tre he deus gant e diegezh hag e skoazellañ a ra gant he arc'hant dezhi.

Manuel evelato, en deus ranket arsav' en dije lazhet e voereb, ma vije bet roet urzh dezhañ henn ober gant ar boliserion, ken brevet e oa ar vaouez. Aon bras en deus e vije bet ret dezhañ kenderc'hel da reiñbzhadoù dezhi. E gwirionez ne ehaner ket ganti, hep menegiñ an niver a soudarded - n'ouzer ket pet- o kaout ganti darempredoù revel, bemdeiz-Doue. Hi noazh-rann, e tle lopañ warni, goulennet digantañ bezañ war evezh da chom hep sevel kleizennoù war an izili ar muiañ gwelus. Un hanter eur e sko. Hi ne sav ket he fenn, ne c'harm ket, ne lavar grik. Leñvañ nemetken. A-benn tregont munud, e stag da zifronkañ. Kunujennoù ar boliserion a gouezh neuze warnañ. Turmud a zo ennañ o welout e voereb er stad-se, kaset maz eo da netra, goapaet, c'hoariet gant he korf dezhi. Dudi a oa er boliserion o welout Manuel o terriñ e nerzh war Dereza.

Meur a blac'h yaouank zo bet graet heñvel dezho. Ar vourrevion o deus en em vataet eus o gwanded wregel evit lezel en o roll o drouknerzh hag o gwallsiou revel.

Hervez REFORME 17 geñver 1970

En e levr " ENEZEG AR GOULAG", Soljenitsin a skriv e veze graet gant 58 reizhiad-vourreviañ, korf ha spered evit diframmañ anvioù.

ARCHIPEL DU GOULAG - le Seuil

Istribilhañ a reont daou Arab, noaz-pilh, dre o zreid, o daouarn ereet a-dreñv o c'hein. Hag e soubont o fenn, ur pennad mat, en ur c'helorn dour, d'o lakaat da gomz.

Brezel Aljeria - 195.

Lakaat a reont istribilh daou Arab, treid ha daourn liammet a-dreñv o c'hein, o fenn troet ouzh an nec'h. Gant un dreustel dindano, ez int neuze brañskellet a daolioù dorn, en doare ma ruz o divgell ouzh barren lemm an dreustel. Grikk gant hini ebet nemet gant unan o treiñ war-du ar soudarded a oa aze : "Mezh am eus , emezañ, en em gavout noazh dirazoc'h".

Aljeria 1956

- An hini yaouank zo roet da ziwall da X... Hemañ a stag d'e c'houderuz ha kerkent e kroger d'e liammañ : hanochennoù dindan e gazeloù, dindan e zaoulin, en e buch ez eo erret ganto. Diouzh an noz eo staget, gourvezet, ouzh ur post. Unan bennak a lak dezhañ ur bodez dindan e benn e-giz goubenner. Reoù all neuze da enebiñ : "Se zo re vray evit ar "boucaque-se"..."

Algeria- deizlevr ur c'hloareg.

E-kerz arackadeg ar Rusianed e trepas Dantzig, merc'hed zo bet kroazstaget bev ouzh dorioù ar c'harrdioù, kozhidi bourreviet betek ar marv...

cilvet Brezel-Bed

- "Ober a ront ur c'helc'h tro-dro din. Stlapet on eus an eil d'egile. Da gentañ, hep sevel o mouezh, kreñvo c'h-kreñvañ goude, hag erfin en ur youc'hal : "Ac'hanta, pezh fall, emezo, komz a ri... !Peur 'ta e savo c'hoant dit ? Doñjer a zeu din ; soñjal a ra din emañ o vont da veuziñ... Bep tro maz a va anaoudegezh diganin, em lakaont da zivorfilañ, en ur reiñ flac'hadoù din gant o holl nerzh... Adlakaet on d'azezañ war ur gedor hag e saver din va gar gleiz. Unan anezho, gant ur pezh pennbazzh a sko, a holl e nerzh, war sol va zroad noazh. C'hwi-banañ a ra an tamm koad. Kavout a rae din e sanke pep tacl e-barzh, e pege er c'hig, e vruzhune an eskern. Bep ar mare, e rae an neuz da skeiñ, gant ar blijadur d'am gwelout oc'h en em deurel en adreñv, evel ur winteroll, hag e c'hoarzhe".

E karc'harioù ar gornaled - Grasset

- Danevellad ur strollad-enklask dileuriet gant ar Sened uruguayat, e 1969, a veneg :

1. Kunujennoù;
2. diouer a zour hag a voued;
3. berzadenn da vont d'ar privezioù;
4. karc'haridigezh e toullbac'hioù enno kaoc'h tud;
5. taolioù distaget en toullbac'h, gant ar meilh-dorn pe bep surt traoù kalz;
6. chom a-sav hir amzer;
7. gwecadur an izili, pa vez kaset ar prisoniad eus ul lec'h d'egile;
8. creadurioù poanous : daouarn staget ouzh an divesker;

9. lakadur ar minaoed tredanel (picana) war meur a lec'h eus ar c'horf, pergen war ar seuliou, an organou-genel, hag ur wech, el lagad;

10. devadurioù gant sigarettenoù war ar fraez, an organou-genel.

Ouzhpenn tri-ugent devadenn zo bet kontet war gof-bihan un toullbac'had;

11. arver pemdeziek eus ar boureviadur bredoniel evit klokaat ar boureviadur korfel, dindan bep seurt stummoù. E-keñver ar merc'hed, krennarzed en o mesk, youl diskouezet da wallañ, dornatadennoù, urzh d'en em ziwiskañ e lec'hioù darempredet gant ar boliserion.

12. merc'hed dougerez gwasket didruez, e meur a zoare, graet dezho dioueriñ dour ha boued. A-wechoù, merc'hed dalc'het en toull gant bugale a vez graet heñvel dezho.

Uruguay - 1969

- Viktor Jara, ur c'haner kanou-pobl, zo degaset da sportva Santiago-de-Chile. Roet dezhañ ur gitar, eo rediet da seniñ ganti. Ha p'edo o kanañ, eo drailhet dezhañ e vizied gant ar warded. Ha troc'het goude. Bazhadoù dezhañ ouzhpenn arack bezañ fuzuilhet. Danevellet eo bet marv an den-se gant testoù niverus.

Chili - hervez NEW-YORK REVUE OF BOOKS -1974

- Gant ar bourevierezh revel ez eur boaz d'ober. Plac'hed yaouank, brazez, zo kaset d'un toullbac'h evit merc'hed. " Tennet e oa bet o blev dezho. Beg o brennoù hag o organou-genel a oa bet devet".

Chili - hervez R.Styron e NEW-YORK REVUE OF BOOKS - 1974

- Atav e Chili, e-doug Reveulzi 1974, ur plac'h yaouank, merc'h an Itron Virginia Ayress, ez eo goloet dezhi he c'horf gant razhed ha kev-nid, edont deuet a-benn da lakaat da vont tre enni.

- stokadennoù tredanel war ar genoù, an organou genel, sankadur ur vazh e-barzh ar fraez, beuzadur, evit Lucio Regueira, 27 vloaz, breutaer a vicher.

Brazil.

- An Dell Vera Magalhaes, 24 bloaz dezhi, studierez, a rank diwaskañ seizh eur " pau-de-arara", tredan, voltoù liesseurt dezhañ, diskarget dezhi en he c'horf. N'eus lec'h ebet enni ma vefe kouezhet war-nañ ur pennbazh hag ur skourjez.

Brazil.

- Carlos Veiner, studier, e Rio-de-Janeiro, zo skourret tredan dezhañ ouzh e benn, e galc'h, e fraez. E-pad dek miz, ne wel ket sklerijenn an deiz. Hag en diwezh eo lezet da vont hep bezañ bet barnet.

Brazil.

- Yann-Mark Van der Weid, e derou gwengolo 1969, korf pemp devezh, a c'houzañv an hevelep boureviaduricù. Gant ar "pellgomz" ouzhpenn, a zo taolioù distaget war ar skouarnoù gant palv an dorn.

Stummoù-bourevierezh.

Setu amañ an doare ordinal da atersiñ an dud e kreizenn Hollywood e-kichen Belfast e Hanternoz Iwerzhon, hervez un Danevell a-berzh-Stad embannet d'ar 6 a viz du 1971 :

- Goleiñ penn ar brizonerien gant ur sac'h stank du pe c'hlas-teñval. Ar pezh a laka anezho da santout e vezont dilezt o-unan-penn.

-Lakaat anezho da glevout ur sutelladenn diehan pe ur fraoñverezh elektronek ken ma zeu o diskouarn da voudinellat evit o lakaat da santout kreñvoc'h pegen dilezet int o-unan.

- O lakaat da chom en o sav ouzh ur voger, hervez anemzalc'h gourc'hennennet, troet war-zu ar voger, gant o zreid dispartiet evel pa vefent a-ramp, hag harpet ouzh ar voger war-bouez o daouarn savet uhel outi, e-pad peder eur ha zoken c'hwec'h eur;

- reiñ, dre heg, louzoù " ar wirionez";

- tennañ tennoù "gwenn" a-dreñv o fenn;

- an nav den a voe goloet o fenn gant seier pounner graet gant danvez stank ha teñval, Ne oa laosket toull ebet evit an aer ha diaes e vezo dezho tennañ o anal;

- rediet e voent da bignat e-barzh vinsaskelloù (helikopteroù) ha lakaet da c'hourvez war leur an nijerez. Grizilhonet e oa o daouarn, lod anezho re start. Goap a veze graet outo gant blenerien an nijerezh ha lavaret dezho o defe o bez er mor;

- en ur zegouezhout er greizenn-c'houlennata, e voent rediet da ziwiskañ o dilhad ha d'en em lakaat en noazh-pilh. Goude ma oa sellet ouzh stad o c'horf, e voe gwisket blouzennoù ledan dezho, ar c'hourgoulioù a veze lezet war o fenn bopred. Neuze e voent lakaet en o sav, o zreid ganto a-ramp, penn o bizied o voustrañ war ar voger hag o teugen pouez

o c'horf : emzalc'h ar furchadeg ("search-position"). Ne vezont ket aotreet da fichal e-pad peder eur pe bomp eur, ha pa raont e vezent bazhataet ha rediet d'en em lakaat en-dro en emzalc'h poanuis-se. Ar memez tra a c'hoarveze ma semplent. Dasseniñ a rae ar sal gant un trouz iskis hevebelekaet gant lod ouzh sutellerezh aczhenn-dour o flistrañ, gant re all ouzh yuderezh un toullerezh dre aer-voustret. Ne c'helled ket padout gant an tomm a veze diabarzh c'hougoulioù ; ha gwasket e veze reuzcudigezh an dud-se, dre ma veze nac'het boued outo pa ne vefe un nebeut kozh tammoù kreun bara sec'h.

Ulster.

- "Bazhadoù" am eus bet war va falyioù-troad, devadurioù ha bourevadurioù revel. Div wech on bet kaset d'an ospital, en ur stad gourhunek..."

Panagouli eus an ENEBEREZH C'HRESIAN genver 1970

- Toullbac'hezed gwallet lies gwech, evit kaout anzavioù diganto.

Chili- hervez TIME ebrel 1974

- Devadennoù gant segalennoù war an treid ha war an daouarn. Stokadennoù tredanel war an organoù revel.

Ur paotr trizek vloaz zo boureviet dirak e dad, ar c'hannad Ruiz Ezerra, a glask neuze en em lazhañ, dre droc'hañ e gorzailhenn gant ur darbod botailh.

Hervez Jerarz-Fransez Blum, kalvezour gall, bet en toullbac'h braziliat - 1972

- Barbie (bev c'hoazh e Bolivia), a dostaas ouzhin gant ur voutailhad dour hag o terc'hel din va fenn d'an traoñ, e klaskas diskargañ dour em genou...Kaset d'ar gibell, Barbie a leunie va gorsailhenn betek va mogañ. (15 a viz Mae 1944).

- Ur volivianeze yaouank zo harzet en abeg d'he micher : ar c'helaouennerezh. Devet eo gant sigarettennoù, bazhataet didruez, savet dezhi hec'h ivinoù gant nadozioù, hanter vouget gant he gouriz e-pad dek devezh

- Leviour Uniad Broadel ar Studierion Braziliat, e 1968, zo labourer dezhañ e gorf a-bezh gant stokadennoù tredanel ha pergen e lounezhi,

- Un intañvez, 22 vloaz dezhi, zo gloazet en he fenn, gant ur boled. hogen er gouli, eo lakaet dezhi ar pennoù-tredan. Brazil 1970

- Stardet e vez ar gouzoug gant un neudenn nilon. Brazil 1970
- E 1973, ar c'habiten-lestr James Mulligan, tapet d'an 20 a viz
meurzh 1966 ha klañvdiat e Portsmouth (Virginia) n'en deus ket termet
evit reiñ da c'houzout e oa bet bourreviet ar brizonidi gant o gwarded
hag o doa 80 % anezho asantet ober diskleriadurioù enep ar Brezel er
Viet-Nam, e giz pe giz. Bazhadoù en deus bet, potailhet ha drammet eo
bet. Evel meur a hini eus e geneiled, ez eo bet serret e-barzh ur c'hell
strizh-kenañ ha dalc'het e-unan-penn, e-korf 42 viz. "Brevet on bet
ganto", emezañ. Holl, d'am meno, zo bet torret o c'horf dezho. Kriz hon
eus bet da c'houzañv ha ne oa ehan ebet". Vietnam.

- A-zivout ar bourrevierezh diwasket gant an emsaverion euzkarat
toullbac'het e prizonioù Franko, ez eus bet embannet ul levr e ti Mas-
pero. Ur skrij eo gwelout pegement a ijin o deus ar boliserion evit
lieskempañ o euzhadurioù; a zegadoù ez int taolennet er skrid-se.

- Rediet eo bet an ijiner Aschar Badizedegan gant an archerion da
azezañ war un doare kador tredanel, evit e lakaat da zeviñ, e-pad peder
eur. Semplet eo bet. Betek al livenn-gein eo aet an devadenn ha kement
a c'hwez a oa ma ne dostae den ouzh hor c'hell dimp-ni. N'eo ket marvet,
teir gwech avat eo bet ret e oberata. Ha bremañ, evit kerzhout, e rank
en em harpañ war e zaouarn. Iran - Meurzh 1972

- Harzet ez eus ur plac'h yaouank eus an 3 a viz du betek an 30 a viz
Kerdu. Peogwir eo nac'het ganti flatrañ he c'heneiled, e stager d'he
boureviañ. Ar gomandanted Tenorio ha Kaezar a ro urzh dezhi en em zi-
wiskañ. Nac'h a ra. Gant ur gontell e freg dezhi Kaezar he milgin. Le-
mel a ra diganti he flotantenn. E noazh eo lakaet ganto. Hag evel-se
eo lezet ganto dirak selloù ha dismegañsoù ar vourevion, keit ha m'eo
padet ar goulennatadennoù, adal an 3 a viz du, da 23 eur, betek antronoz
da 4 eur diouzh ar mintin. Kinniget eo dezhi goude bezañ gwallet, ta-
mallet dezhi bezañ amourouzez ur ezel eus ar " yaouankizoù micherour
kristen" hag an aluzenner. Ferv he deus lavaret nann. Nac'het start
he deus.

Tenorio a lope warni gant troad ur skubellen. Kaezar a yac
dezhi a daolioù dorn hag a daolioù troad; he blev a chome en e zaouarn.
E kerz ur c'houlennatadenn all, ez eus skourret dezhi un orjalenn-tre-
dan ouzh he c'hroalez hag un all war he gar. Anzavet he deus n'he ije
ket harzet paneve un nerzh eus an nec'h.

Danevelliñ a ra neuze al leanez ez eo chomet e-unan-penn gant un is-ofiser, mesk-ha-mesk gantañ goulennataerez, farserezh, ha jestroù gadal. Pemp devezh war 'n ugent e kell a-ziforc'h eo chomet en toullbac'h. Hogen setu komzoù un den all :

" Kaset da Ribeiro Prato, evit bezañ barnet, on bet goulennataet gant M.Lamano, unan eus ar gomiserion rannvroel, en deus va aterset en un doare divergant, o reiñ din javedadoù : n'oa nemet hopadennoù ha taolioù. Karvanadoù e oant hag am leze bouzar groñs".

Brazil 1969

- An tad Soligo a oa beleg-micherour e Osasco, e fabourzioù Sao Paolo :

" Va lezel a reent, va daouarn koeñvet gant taolioù bazh. Va ziskouarn, va daoulagad, va avu, va lounezhi a lakaont hogos da darzhañ dindan an taolioù dorn hag an taolioù troad. Bourrañ a reent o pilat va organoù revel. Evel diaouled, e lammont warnon, ha gant o daou droad, e flastront din va feultin, va c'hostezioù, poull va c'hof".

" Noazh, gwech em c'hoazez war ur gador, gwech stlapet war al leurzi, daouarn ha treid erect, e skourront din orjal tredan ur magneto ouzh lodennoù kizidikañ va c'horf ha se e-pad test da peder eur, gant stokadennoù kendalc'hus ha bep tro kreñvoc'h-kreñvañ. Lopañ a raent ivez gant ul lienenn c'hleb hag e strinkent dour warnon, d'ar stokadennoù da vezañ feulsoc'h".

Brazil 1969

- Gwelet en deus an tad Soligo merzheriañ ur vamm dougerez, a zo marvet gant he bugel.

- Gant jotadoù distaget gant an daou zorn, o deus tarzhet panell un den a 53 bloaz, micherour er vetalouriezh.

Brazil 1969

- Ur paotr a 12 vloaz zo boureviet.

Arc'hantina 1970

- " Lemmel a rit evel ur foll" diwar an taolioù o kouezhañ evel ar glav, diwar an diskargadennoù tredanel, e-pad dervezhioù ha nozvezhioù.

Arc'hantina 1970 - Ongonia.

- " Goulennata a reer ur prizoniad all da dirazañ eo gwallet e wreg gant ar boliserion. Alies-tre, e vez diframmet an ivinoù, tarzhet an daoulagad, mac'hagnet skrijus ar c'horf. Gwelet em eus va-unan, en toullbac'h e-lec'h m'edon dalc'het, ur vaouez dougerez, toullgofet gant he bourevion ha mervel un nebeut deizioù goude.

An Tad Talpe - Brazil 1969

Deuet ez eus soñj dezhi eus ar C'hrist, bet diwisket eñ ivez araok bezañ kroaastaget. Seurt koun zo bet harp eviti.

Brazil 1970

- Merzhererezh ar "gwele-skourr". Itribilhet on bet ganto, dre an daouarn hag an treid ouzh un treust, un hanter metrad a-us d'an douar. Goude un eur er stad-se, on bet adc'houlennataet ganto war kement a felle dezho. C'hoant o doa lavarfen e oan ur sponter. Div eur on chomet a-istribilh e giz-se".

Brazil 1970

- E miz here 1969, ez eo harzhet ar C'hoar Maurina Borges da Silveira, renerz Oaled Santez Anna Ribeiro Prato, e Stad Sao-Paolo, Setu amañ pennadoù eus he lizher :

" Eizh poliser pe muioc'h a voe en-dro din... Diouzhtu on kroget da lavarout dezho ar pezh a ouien eus luskad re yaouank va zi, peogwir n'ouien mann diwar-benn ar sponterezh, a vez kement anv anezhi... N'oa ket tu din da genderc'hel, rak, a bep eil, e veze troc'het din va c'haoz gant forzh youc'hadennoù ha gourdrouzoù, dre luc'hadoù, mezh din o adlavarout :

- Gouzout a rez ez eus bourrevierezhioù ganimp; evidout avat n'int ket diaes da c'houzañv, rak buhez ar seurezed zo endev ur boureviadur. Ar pezh ac'h eus ouzh da bennglinoù zo bloñsadorioù, dre ma pedez ken alies... ha perak 'ta e pedez bremañ ? Petra a dalv dit ? Mann ebet ! N'out ket mui gwerc'hez; emcur o vont d'ober un arsell-teur. Diseurezet ac'h eus . Mat! ganit e c'haller ober ar pezh a venner. Amourouzez Mario Lorenzato ez out (blenier ur strollad kelennerion ha studierion) ? Lavar ya; a-walc'h eo hag e vo peurechuet pep tra. Arabat dit kontañ bidennoù : heñvel-mik out ouzh ar re all...

D'ar pred-se, eo bet skourret ganto an ardivink da ober stokadennoù tredanel ha plijadur o deus bet diwar va c'houst. An orjalenoù peg ouzh va biz-yod a rae d'am c'horf a-bezh tridal; skourrañ ha diskourrañ a raent e-pad ur pennadig amzer. Kaset on bet goude d'ur c'hell gant div blac'h yaouank all. Tenn eo bet din gouzañv eus 19 eur betek diwezhat an noz, eus un tu, komzoù dizoare ha kunujennoù hudur ar soudarded. Hag eus un tu all, garmoù pistigus ar baotred yaouank bourreviet ..."

- Astennet e vez an aberzhiad war ur skaoñ pe war un taol, e dreid o vont dreist un tammig. A daolioù bazh pe barrennoù houarn e vez neuze skoet war e solioù. Tarzhet ar c'hr'c'hen dizoloet ar bev, ne c'hall an dud-se kerzhout e-pad sizhunvezhioù. Hag evit lakaat an den da ganañ muioc'h c'hoazh, e vez skuilhet holen war ar goulioù. "Phalanga" a vez graet eus ar bourreviezh-se. Gresia - 1965

Penaos e vourevier ?

O vont pelloc'h eget freuziñ ar c'horf ?

D'an ampoent, n'eus mui a vourevion, ganto turkezioù houarn tomm, spontus ken ma oa. Kalz dilastesoc'h e vez sevenet bremañ al labour. Gwisket eo hor bourevion arnevez gant flotantennoù gwenn ha stummet eo ar ouenn dud-se e skolioù arbennikaet.

Bez e c'haller merzout kement-mañ : seul vui m'eo diorroet ez skiantel, ur vroad, seul vui ez eo diorroet he zuennoù bourreviañ hiziv.

An doareoù a vremañ a zo kalz soutiloc'h ha kalz akedetoc'h, hag a-bell, eget stumm divergent, eeunik a benn ar fin, an taolioù bazh, barrennoù houarn ha zoken an devadurioù a wechall.

Ha dreist-holl, deuet eo war wel un doare all da voureviañ, hag a zisoc'h da vreviñ personelezh ar boureviad; war wellaat- mar galler lavarout e gwirionez - eo ez a dalc'hmat ar c'halvez-lezhioù a ize-laerezh ("dégradation") gant ar vourevion-se. Seurt boureviadurioù ne zleont ket lezel roudoù war o lerc'h. "Enklaskoù" eo a ya eta en-dro war an dachenn-se, sañset, enklaskoù skiantel lakaet gant ar boliserion da vont enep d'an den? Reoù 'zo a-hend-all, a zeu da vezañ arbennigourion war ar "vicher", evel an ofiserien-bolis braziliat-se, aet nevez 'zo da "labourat" da Chili. Arabat avat klask re bell, rak, e 1972, gant soudarded eus an OTAN, e-doug pleustradegoù-brezel, e Belgia, ez eus bet merzheriet soudarded all, kenvroidi dezho koulskoude. Evel maz eo eztaolet ervat, gant ar film AN ANZAV (L'Avcu - 1969), e klasker "skarzhañ ho kreizon a zen dieub a bep elfenn denel". Mennout a reer seveniñ dismantr an den evel den, en ur ziskenn betek e zonderioù, evit e c'hloazañ ez skiantel. An dra-se, dres, eo a zisklerie shah Iran e 1972: "Sevenet he dous Iran arackadennoù divent war an holl dachenn-

noù goulennataerezh hag all. Va c'hredit, n'eo ket dav ken boureviañ evit lakaat an damallidi da anzav... Tuennoù muioc'h lipet a zo, evel mardeo gwaskañ war ar spered."

Ha penaos gwaskañ evel-se war spered an tamallad ?
Setu penaos e reer eta hervez al levr AN ANZAV gant Arzhur London - Gallimard 1969- hag hervez ar film savet diwar al levr-se o tanevelliñ pezh a dremen e-dia barzhar bed komunour :

- . Rediet oc'h da gerzhout, noz deiz, hep ehanañ.
- . Miret e vez ouzhoc'h a gousket.
- . Eurioù-pad e ranker chom er sav dirak ar c'hargiad dezhañ ar gefridi fardañ an anzavioù.
- . Ar c'houlennataerion, azezet, a bep eil, a zobr, naon bras dezho, dirak an toullbac'had goullo e gof.
- . Diskouez a reont dezhañ anzavioù sinet gant tamallidi all, bet e wellañ mignoned ha bremañ o tiskuliañ emañ en taol ganto war-eeun.
- . Gourdrouroù war e diegezh na car mui mann diwarnañ.
- . Pegañ a reer ouzh an enklask devoùoù resis e-barzh ar film , (darempred gant ur benvegad amerikad en deus roet tu dezhañ da vont da bateañ e dorshellegezh da Vro-Suis.) AN ANZAV 1969
- . Diskiantadur diwar skuizhder ha sec'hed.
- . Asotadur dre vannañ diehan ur sklerijenn dic'houzañvus.
- . Arver drammoù evit dispenn an hinidenn.
- . Marc'hataerezh diazezet war promesa skañvadur ar c'hastiz.
- . Noazhder e-doug ar goulennatadennoù hag ar bourevadurioù.
- . Pikadennoù gant " serom ar wirionez ".
- . Ar penn a ya groñs digant unan. Ur gounezour, brudet er bed a-bezh, Richard Domingez Dulley e anv- hiziv, ne c'hall mui anavezout e bried.

Dre vras, doare sadek ar boureviadurioù a zo diaes da livañ eveljust: c'hoarvezout a ra ar sadegezh eus ar jahinadurioù eus :

- ober neuz da lakaat unan d'ar marv.
- lakaat unan da c'houzañv faltazioù ha youloù gouezidi sadek. Meur a hini en deus kavet gwelloc'h an emlazh eget ar rikladenn c'horrek-se war-du an dizeneldec.
- lakaat bugale da sellout ouzh jahinidigezh o zud-int. Brazil 1970

. Ur bugel, bloaz zo, bet boureviet dirak e dad, en deus en em daölet war ar vourevion. Drouklazhet eo bet ganto war an taol.

Lezvarn Russel , ebrel 1974 -Brazil.

- Evit fuzuilhañ paotred Budapest, goude reveulzi 1956, e veze gortozet e teufent d'an oad diouzh lezenn d'o lakaat d'ar marv.
- Mervel hag ouzhpenn gedal ar marv, sed unan eus ar boureviadurioù pegen lipet ha pemrlipet, bet ijinet gant moc'h o dremm tud !
- Drammoù a arverer e Reter Europa.
- Diouer a gousked er Republik Dominigat.
- Digenvezadur e-pad meur a zevezh, er sav, dindan ur gougoul, en ur gambr disonekaet Norzh-Iwerzhon.
- Er Vietnam, taolioù skoet war un donell leun a zour, onni an aberzhiad, o santout ar stokadennoù, hep na vefe gwelet warnañ an disterañ bloñsadenn.

Mantrus eo gouzout ez eus mezeion o reiñ o skoazell, oc'h arveriañ o barregezh evit ur seurt amkan. E Brazil evel en Unvaniezh Soviedel, er bredklañvdioù peurgent. Gouzout a reer ez eus skor ar medisinerzh, e bro-Brazil, pe evit gwashaat ar poanioù pe evit mirout ouzh ar boureviad da vervel.

Pet a dud boureviet zo dre ar bed ?

Bez ez eus sifroù AMNESTY INTERNATIONAL, luskañ etrevroadel evit stourm a-enep d'ar bourevierezh, bodet gantañ e izili, e Pariz, e miz kerdu 1973 :

+ 350 000 er Vietnam.

+ 80 000 in Indonezia

+ 40 000 e Bangladesh

+ 6 000 en Iran

+ Pet e Sina, e-lec'h maz eus kement a "gofesadurioù dre heg", tra ma n'eus frankiz soñjal ebet ?

+ Kantadoù e Gana, Ouganda, Soudan, Burundi, Mali, Gine, Tchad, Gabon, Kameroun, hogos e Afrika Zu a-bezh.

+ En Unvaniezh Su-Afrikat, e Rodezia, e Maroko...

+ E Chili, Brazil, Paragway, Kouba, Republik Dominigat. E 1972 en deus diskleriet AMNESTY INTERNATIONAL kaout keloù eus boureviadur da heul

ar goulennatadennoù, eus hogos holl Stadoù Amerika Latinek, "nemet salv Kosta-Rika".

+ Miliadoù a doullbac'hidi politikel er c'harc'harioù portugalat, spagnat, soviedat, tchekoslovakat, gresian, turkat.

Atav, hervez AMNESTY INTERNATIONAL, e vefe, er c'houlz-mañ, ur milion bennak a dud, en toullbac'h, o vezañ ma ne blijont ket da levierezh o bro, en abeg d'o emouestladur politikel, d'o gouenn, pe d'o c'hredennoù. Kant pergont eizh (148) riez a zo er bed ; ur c'hant(100) anezho o deus prizonidi evit "felladenn-soñjal". Boaziek eo ar jahinerezh e-barzh tri-ugent (60)anezho. 500 den zo marvet diwar ur boureviadur pe aet diwar wel eus meurzh 1969 da even 1972, e Brazil (titour Amnesty).

Hag an Norzamerikened ?

E kerzh Kendalc'h AMNESTY INTERNATIONAL, e Pariz, e 1973, e kredas Sean Mac Bride lavarout : " Seblantout a ra dimp o defe ar gwazerezhioù kuzh amerikad kelennet bourevion er broioù-se". Hag ar broioù-se eo re Amerika Latinat.

E Brazil ez eus "Akademiezhoù jahinañ" frammet diwar skouer skolioù Washington ha skoaziet gant Stadoù-unanet. Braziliz a ya neuze da "labourat" da Chili ; AMNESTY INTERNATIONAL a zo asur edo du-se, e miz du 1973, "arbennigourion" estren, hag o deus roet kentelioù pevar devezh-pad, e Maodiernezh an Difenn e Santiago.

Penaos gouzout ?

Atav ez eus tu da c'houzout. E holl toullbac'hoù ar bed, ez a ar "pellgomz arabat" en-dro. En U.R.S.S., milieroù a Soljenitsine en em laka en arvar, evit kelaouiñ ar re all. E Su-Vietnam, ar warded zo da brenañ ; gant arc'hant, ez eus tu da gaout kelc'hir.

Perak e vourevier ?

-Kain a zo anezhañ a-hed an holl amzerioù.

- "An den, eme ar Bibl, a zo ur boud kar-ar-gwad (un den techet d'an droug), dudi fall ennañ pa wel ar re all o tiwaskañ poan;"

- N'eo ket dav skrabañ pell, evit dizoleiñ dindan ar goc'henn, ene an evnpreizh. Berrspredet eo an drougiezh. Ha kriz.

- Ur bleiz e c'hall an den dont da vezañ e-keñver an den. Ul loen gouez a vourgousk e kalon pep den, atav darev da zihuniñ.
- N'eo ket graet an den gant un tamm nemetken. Henezh a zo madelezhusmeurbet, divergont, kriz zoken, e degouezhioù 'zo.
- Kerkent ha ma lezer ar bondougou da zirollañ, e vourevier ar re all
- Jermena Tillon a zo bet dezuget e 1942 da Ravensbruck. El levr (Le seuil -280 p. 1973) skrivet ganti, tregont vloaz goude he c'halvar, e lavar deomp ne oa ket euzhiled an dud kiriek eus ar reizhad dezrannet ganti. Nann, tudennoù boutin nemetken. E prosez Hambourg, e-lec'h ma voent barnet gant ul lezvarn saoz, Jermena Tillon a oa evezhierez :
" Bremañ, emezi, emaint aze hag e sellen outo, kribet brav, gwalc'het mat, dereat an tamm anezho... n'o doa ket doare da vezañ gwall zisheñvel diouzh an den seven keitat" Padal, ar re-se, e Ravensbruck, a veuze babigede sailhoù, a lakae binim e soubenn ar re glañv, e hade brein-krign war divesker liseadezed Lublin. Kement a zo bet gwelet gant hor rummad-ni abaoe tregont vloaz a ziskouez a-walc'h pegen bresk eo an dud war dachenn ar vuhezgezh..."

E-touez devouderioù ar bourevierezh e c'heller menegiñ :

A. an dispriz evit an nesañ.

N'eus ket tu da vezañ fraesoc'h eget kadoriad lezvarn an goronaled gresianek. E-pad prosez Panagoulis, unan eus izili an "Eneberezh gresian" da ziskleriañ : " Nebeut a dra gwirioù an den!"

- C'hoant a zo da lemel e enor digant an enebour ha, drezañ, digant e gealioù, an uhelvennad enkorfet gantañ.

B. An Ideologiezh.

- Un ideologiezh a laka un den da goll e skiant vat.
- Un urzhiadur kevredigezhel bennak a zo da stalañ pe da zifenn.
- Ar feiz komunour, an urzh komunour a seblant kaout ezhom, evit bezañ divrall da vezañ anavezet ent foren gant ar re n'o deus c'hoant ebet anezho.
- Mennout a reer derc'hel en he sav ar "sevenadurezh kristen".
- Anavezet em eus un ensaver, dizrouk peurvuiañ, kuñv zoken, kemmet en ul loen gouez gant ar youl politikel.

- Petru Dumitriu a gomz eus "Krizder kounnaret an dud ez eo diar-var en o spered emañ ar wirionez ganto". Reizhiadoù soñjal . Er pleustr e c'hall reizhiadoù soñjal droch en em ziskleriañ e ser bourevierezh. Empenniñ a ra an den emañ o vont da ziazezañ ar reizhded c'hroñs ha neuze e kred dezhañ e c'hall ober forzh petra. Gwrizioù don he deus taolet an naziouriezh. Ar binimoù dislonket ganti a gendalc'h d'ober o reuz. " Ar vourevion, a lavare ar Jeneral de la Bollardièr, e 1972, a zeue da vezañ pezhioù divergont, netra denel enno. Hep mar e teue soñj din eus an nazied."

K. Ar youl da drec'hiñ war ur bihanniver.

- "Bez e c'hall ar jahinerezh bezañ ivez gwask ouzh ar brasniver a-enep da gredennoù ar bihanniver pe genelioù bihaniverel, kerkoulz war dachenn an armerzh nevidek ha war hini an armerzh kevansteuñvek".

Marcio Alvez - AMNESTY- 1973

- "Natur eo e vefe bourevierezh er c'hevredigezhioù maz eus enno ur renkad bihaniverel o vestroniañ ur brasniver.

Marcio Alves - AMNESTY - 1973

D. An urzh da virout.

- Boureviet e vez evit derc'hel an urzh, kentoc'h "AN URZH". D'an 8 a viz here 1969, e kroge an Tupamaros-ed e kêr Pando, en Uruguay. Evit enebañ ouzh ar gouvrezel, e teu ar bourevierezh da vezañ un hent-enn a stourm. An darn vrasañ eus ar brizonidi tapet e Pando a veze boureviet didruez. Kenstokoù, eneberezhioù a zo ; truez ebet evit ar a goll. Ret eo o diskar groñs. Ret eo diwriziennañ krenn an elfennoù a zispac'h : ar re a c'houlenn frankizoù, ar re venn kemmañ ar fram-madurioù kevredigezhel, ar re a fell dezho ez afe ar renkadoù a-is war-raok, ar re a c'hortoz ur gwir emrenerezh broadel.

E . An ezhomme eus ur benveg levrierezh efedus.

- AR jahinerezh a zo ivez ur benveg evit sturiañ, evit diskouez ha mirout ar galloud. Un duenn evit levriañ eo, bep tro ma pennfoll ar galloud. E 1973, en abadenn skinwel TITOUROU AR SKRAMM, e-kerz un diviz war FRANSEZAD BOURGES, ar c'helenner alaman Pitch Heidenberg a anve ar jahinerezh "oferenn ar Stadoù hollvelour...liderezh an holl-velourion".

- "Pa goll ur c'hendere a zreistelezh speredel, he deus graet dezhañ kaout an tu war-chorre, e tle kaout mall d'en em dennañ, ma ne fell ket dezhañ bezañ kriz, rak ar c'hrizder eo lod ordinal an holl c'halloudoù a ya d'an traoñ".

Eujen Warlin 1868

F. C'hwitadenn ur sevenadur.

- "Un arouez eo ar bouevierezh n'eo ken gouest ur sevenadur da ziwall an den diouzh e vondoug d'ar marv. Saotret (louzet) eo an uhelvennad a soñjer skorañ. ESPRIT -meurzh 1962

- Un arouez eo ar jahinerezh eus kleñved ur gevridigezh. Evel un heskedenn, a zo ur merk eo klañv ar c'horf a-bezh.

G. Ar gevredigezh c'hreantel.

" Diwar he mentadurioù herrek, par da re un ifern, ez eo intret ar gevredigezh c'hreantel gant un doug d'an tagañ a ya a-du gant ar feulster hag a ro tro d'ar jahinerezh d'en em ziskouezh en-dro dindan doareoù skiantel..."

- " Er bed kalvezel eus dalc'hmat youl da drec'hiñ pep skoilh dre an holl araezioù".

H. Un aergelc'h a sponterezh.

- Jahinat a reer evit lakaat da ren un aergelc'h a sponterezh.

- Dirollet e vez ar sponterezh betek e varr uhelañ, evit diskouez ez eo gouest ar renad da lemel pep frankiz digant ar re a venn derc'hel penn.

I. Ur c'halverezh titourañ.

Ar jeneral Massu, dreist-holl, abaoe m'eo bet skrivet gantañ e levr LA BATAILLE D'ALGER, en deus roet brud d'an dezenn-se, displeget gantañ evel-henn :

" Ur wech c'hoazh", emezañ d'an NOUVEL OBSERVATEUR- 29 a viz du 1972, " pegen kriz bennak ha ma vefe kement-se a-wechoù, enklask un titour zo deuet da vezañ un arm er stourm enep ar gourzhtreiñ ha marteze, er stad m'emañ an araezoù a zo dalc'h ar gwazerezhioù en o c'harg mirout an urzh, an hini an nebeutañ lazhus."

(1) Gourzhtreiñ, gourzhtroerezh : subversion.

E-berr, n'eus ket tu da ober a-hend-all, e-doug ur brezel dispac'hel. Dont a ra ar bourevierezh da vezañ un droug disteroc'h, o reiñ tro da chom hep seveniñ un droug kalz gwasoc'h.

Lakomp un den atebek eus an urzh foran en ur gêr. En e zalc'h emañ un dudenn, hag a c'hall, asur eo, diskouez dezhañ ul lec'h boutin maz eus bet lakaet ennañ ur vombezenn emorset. Seurt bombezenn a c'hall lazhañ un dek den bennak... Hag ar gwir zo da aberzhiñ a-ratozh kaer buhez dek den dizrouk d'ur bennaenn a vuhezouriezh, dezhi ar startañ diazez? Daoust ha n'eo ket paeañ gwall ger divlammed hor c'hreizon hiniennel ?

"Soñjal a ran", eme ul lenner da OUEST-FRANCE, e 1972, er soudarded ret dezho arveriñ ar jahinerezh evit trec'hiñ war ar sponterezh. Bet int bet "kurusted" e-skoaz ar fellagaed. Gouezoni skrijus ar re-mañ he deus roet abeg dimp da vezañ kriz a-wechoù, gwir eo. Chomet omp avat, kalz en tu-mañ eus lezenn al Leviegezh : " Lagad evit lagad, dant evit dant". E brezel Aljer, kement tra zo bet graet evit krennañ ar jahinerezh ar muiañ ar gwellañ, e reoliñ ha, pergen, bezañ a-du d'ober gantañ nemet pa vez ret-mat kaout un titour, da bellaat gwalldaolioù kant kwech skrijusoc'h, o c'hoarvezout gant tud dizrouk".

Ul lenner all (Ouest-France -1972) : " Arvestet em eus ouzh goulennatadennoù garv, da lavarout eo gant "magneto"... Met da zibenn an abadenn, e veze gren ha dibistik ar paotr. Ha se a veze graet alies evit mirout na vefe adsevenet euzhusterioù. Morse n'em eus gwelet soudarded c'hall o vac'hagnañ korfoù".

Bez e vefe eta ur bourevierezh "disaotr" evel maz eus bombezennoù atomek disaotr. Lavarout a rafen ur boureviadur dic'hrevus, na chomfe roud ebet war e lerc'h, diboreet ("aseptique") da erbediñ, en abeg d'e efedusted politikel.

Ha kavet e vez atav tud da sentiñ, hep breutaat urzhioù o renerioù, evit mont war-raok en o micher.

Petra soñjal ha petore emzoug kaout dirak ar bourevierezh ?

A-dal d'ar bourevierezh n'eus ket daou emzalc'h da gaout. Dalc'hmat eo ret lavarout nann da ne vern petore bourevierezh hag da ne vern peseurt abeg, evit diskoachañ ar wirionez. Mirout atav ouzh ar boureviadur da dremen, evel droug ret.

An hini a fell dezhañ strivañ ouzh ar bourevierezh a zle sankañ don en e benn ar reolenn c'hrons-mañ : gwech ebet. A-raok pep tra, e ranker lakaat en e spered ar ger "gwech ebet". Da c'houde hepken, e c'haller addeskiñ poellata ha stourm e kreiz ar gwashañ emgavioù.

"Arabat eo en em ziskouez gwan na."prest da gompren" war ar poent-se. Ret eo touiñ na vimp biken diouzh tu ar vourevion, ha pa rank-femp bezañ aberzhidi en abeg a se".

Pastor Aime Bonifas -1972

Kinnig ar bourevierezh evel an araez n'eus nemetañ da vezañ arveret en ur saviad dibar ne c'hell nemet breinañ ar spered. Rak dismantret e vez neuze startijennoù diabarzh an den ha gwanaet e vez an nerzh-kalon. Koulskoude ez eus ezhomm anezho, rak ret eo diarbenn an urzhioù hag an aergelc'h, pa vezer poliser, soudard, mezeg. Ne ra ket bec'h ar spered da glask un diskoulm all, pa vezer tuet da dizhout an efedusted war-eeun, dre ar boureviadur. Rak diefedus eo, war hir dermen, peogwir e sav diwarnañ re a gasonioù. "Ar Brein-hign-se a vrein donoc'h-donañ ur bed e-lec'h m'eo kemmesket meizad an efedusted gant hini an denelded ". (Folliet).

Ne c'haller nemet bezañ a-enep d'ar bourevierezh, ne vern piv eo an oberourien ha ne vern pe uhelvennadoù a soñj dezho servijañ.

Rak kement den en deus ar gwir ne vefe ket lamet digantañ e enor-den hag e vefe doujet e zellid.

"E ser ur meizad hollveliel eus ar gevredigezh, ne seller ouzh an den nemet evel un darn eus un hollad, ur rodad eus ur benvegad, un ardivink ma ra gantañ an istor. Gwelet gant ar poell hag ar feiz, an dudenn zo un talvoud dizave rak pep den n'eus nemet ur skouerenn anezhañ ha ne c'hall bezañ keveskemmet gant hini all ebet."An hinienn, eme Tomaz Akwino, zo estaoladur ar pezh a zo ar c'hokañ en hollved". An doujañs... evit an hiniden zo eta ur bennaenn diaz eus ar gwir hag an divezouriezh ("morale"). Pennsi ar jahinerezh zo mennout diframmañ anzavioù, en ur lakaat un den da ziwaskañ poanioù kriz; graet e vez outañ evel pa vije lamet digantañ e dalvoudegezh dezhañ e-unan. Ne vez kemeret nemet evel un araez. "Groñs e tleer kondaoniñ ar bourevierezh, eme Paol VI, dizegemerus int, hiziv, zoken evit ober ar reizhder ha difenn an urzh foran. Ret eo e ziskulian hag e derriñ". (21 here 1970)

Kardinal Duval -Aljer - 1973

Ha setu perak e c'haller lenn e Diskleriadur Hollvedel Gwirioù an Den 1948, er pennad V : "Nikun ne vo sujet d'ar bourevierezh, na da bonnioù pe embregadurioù ("traitements") kriz, dizenel pe viltañsus.

Hag heñvel eo en holl destennoù lezennel etrevroadel : "Kenemglev. Jeneva an 12 a viz cost 1949" "Diskleriadur Amerikan Gwirioù ha Dleadoù an Den", "Diskleriadur Gwirioù ar geodedourion er Riezoù hag er Broioù Arabat" "Emglev Etrevroadel war ar Gwirioù dinazel ha politikel" "Kenemglev Amerikat an Den." "Lakaat a ra ar bourevierzh an den e rez ul loen. "Anat eo ez eus aze un diouer a zoujañs e-keñver an den graet outañ evel pa vije un aneval." (Sean Mac Bride, bet Ministr Aferioù-Diabarzh Bro-Saoz, e kerz Kendalc'h Amnesty International, e 1973)

Warlene c'hoazh, an eskibion alaman o deus savet un diskleriadur kaset ganto d'an holl Gannaded enkredet accrédité e Bonn, o pouezañ war gement-mañ : un torr eus gwirioù diaz an dudenn eo atav ar boureviadur enep toullbac'hidi ne vern petore torfed eo o hini.

Puilh eo en hon oadvezh an diskleriadurioù war dellid mab-den. Na puilh evelato an tagadurioù a-enep d'an dellid-se "marteze dre ma ne oar mui hon amzervezh petra eo an den". (Folliet -30 kerdu 1971) N'en deus gour ar gwir da izelaat kement un den all. N'en deus gour ar gwir da ober kement a boan d'un den all. En e levr, Pred an Noz, (Flammarion) Andreu Miguel, kazetennar, toullbac'het e Kairo, e 1961, a lavar ez eus chomet ur ouezoni spouronus en hentenoù arnovez ar gerreizh, (polis), hor boa kredet denelaat abaoe lamedigezh ar "goulenn". Ya, holl e tlefeomp soñjal evel Jermana Tillon : "Ne c'hallan mui gouzañv e vefe mezhekaet an den". (skinwel). Hag abalamour m'eo dismegañset ha vilaet an eneoù gant ar bourevierzh, ne c'hall morse bezañ pardonet a-grenn, salv gant ar sent hag ar verzherion. Rak un droukrañs en em sil dre-holl en den, skoilh evit pep peoc'h diavaez ha diabarzh.

DISANTR AR BOUREV E CHAN

Vilaat a ra boureviadur an hini a ra gantañ. Dont a ra ar vourevion da vezañ sadeion, roboded dizenelaet pe dic'hoanagigi o vezañ m'o deus diskennet ken izel. Nag a yaouankizoù gloazet don o spered gant ar pezh a oa bet goulennet diganto e-pad brezel Aljeria. Ur gwallldaol eo bet evit o stummadur. N'eo ket pes en em zizober eus

Viruzioù 'zo paz int bet strewet du-mañ du-hont. "Paotred a 20 vloaz, n'int ket boaz da soñjal, nebeut diorroet, en em ziroll, maz eo un doñjer, ma welont e vez lezet kabestr war o moue. Un isofiser, 25 bloaz dezhañ, fizieta ennañ holl c'halloudoù ar polis, roet dezhañ ar gwir war ar vuhez ha war ar marv, se ne c'hall ket bezañ! An hini ne zegemer ket emañ war an hevelep renk hag an hini all a zo dirazañ a gol e zen lded e unan."

(Jeneral La Bollardière- La vie Catholique 1972)

Ouzhpenn-se, diboell eo merzheriañ an den evel-se. Droch-tre e vefe krediñ ez eo efedus ar jahinerezh e c'haller fiziout en hentenn-se. Hiniennoù, gwasket maz int, o deus komzet. Reoù all n'o deus lavaret grik ha pa vije aet o buhez diganto. Kalz avat, o deus danevellet ar pezh e oa c'hoant o dije danevellet. Ha p'he deus ul levrierezh diframmet re a anzavioù, kofesadur foran ebet ne vez sellet outi evel gwirion: den ne c'hall mui krediñ e ve gwir bater kement a vez anzavet gant un tamallad dirak e varnerion. Bloavezhioù hir hag ur c'hemm don er vuhezgezh, ar gerreñzh hag ar barnerezh sorredel -hag e nouspet rier all- a vo ret a-benn ma ve roet an disterañ talvoudegezh d'ar gerioù ma anzav ganto un tamallad bezañ kiriek eus tra pe dra.

Ur sottoni, ur c'holl amzer eo ar bourevierezh evit ar re a soñj dezho bezhañ efedus. Hervez ur arbennigour war an titour, ned eo nemet titour ar re ziot. Ar re ziot ha na welont nemet ar raktal, paz eo ret soñjal er politikerezh war hir dermen, ar politikerezh a glask da gentañ mignoniezh etre ar geodedourion e-mesk ur bobl hag ar peoc'h etre an dud." Ar bourevierezh n'eo ket hepken enkadenn ur sevenadur, met ivez, dinac'h ha dilez ar poell". (Steiner). Komz eus divezouriezh ("morale") la dud a zo dinden gzelge an efedusted a zo, e gwirionez, koll an amzer.

Ha bremañ, evit an hini en deus ur feiz, evit an hini a gred e Jezuz Krist ?

E 1971, e Bro-c'hall ez eus bet goulennet, war ar straed, digant an dremenidi, o soñj diwar-benn un destenn a-zivout ar jahinerezh, tennet eus Diskleriadur Gwirioù an Den a zo war roll-labour ar skolioù kentañ derez. Respontoù : "Se zo maouriezh !"
Ur sorc'henn a uhelvennadourion...! Kement-se zo kristeniezh...!

Digenglotusted klok a zo etre an divez kristen ha pleustradur ar bourevierezh. Eskibion Uruguay a gelenne, e miz kerdu 1972, ez eo " ar boureviadur nac'hadur groñs dellid an den, krouet diwar skeudenn hag hervez heñvelidigezh Doue". Ur feizour a zle ober ouzh an den evel pa rafe ouzh ur boud sakr : ur boud krouet gant ur veradenn eus poell, frankiz, karantez an Doue a zo ar Poell, ar Frankiz, ar Garantez. Ne c'haller ket merzheriañ an den-se, paz eo degemeret-ñ evit ar pezh maz eo e gwirionez. "Ne oa tu ebet evidon da soñjal", eme La Bollardière", e c'hellen lavarout e oan kristen ha war an hevelep tro, degemerout ar bourevierezh. Evidon, ur breur d'ar C'hrist eo ar c'hristen. Pezh a dalvez a-grenn eo kaout kalon ur breur evit un den all. Setu diazez va buhez, ster va buhez : santout emañ dirak ur breur d'en em gavan dirak un den all. Setu sichenn va buhez".

Ouzhpenn, kement den a zo gwasket gant fallagriezh an dud all, e sav war e zremm dremm ar C'hrist, Krist an Ecce Homo. Hag ar re a zifenn, a frealz, a zieub o breudeur merzheriet, a ro skor d'ar C'hrist e-unan. Jezuz a Nazared en deus en em c'hraet unan gant an tud brevet dezho o izili hag o ene.

Ha mar fell dimp pouezañ grevusted pec'hed ar bourevierezh eo dav gouzout e oa, da vare ar Grenn-Amzer, daou bec'hed marvel, da zic'haouiñ dre ar pirc'hirinaj : ar binimadur, dre ma n'eus ket tu d'en em zifenn outañ hag ar boureviadur, dre maz eo pec'hed an diaoul e-unan. Bourrañ er er jahinerezh, se zo bezañ Satanaz. An hini a vila, a zastr, a freuz. (Malraux-skinwel- 30 ebr el 1972)

Penaos stourm a-enep d'ar bourevierezh ?

Evel ma fell da AMNESTY INTERNATIONAL, tremen ret eo skarzhañ eus ar bed ar bourevierezh, evel ma ne fell mui da zen klevout anv eus ar sklavelezh. Den ebet n'en deus ar gwir d'en em voazañ ouzh an euzh-usted-se. Kement-se a vije ur giladenn evit an denelezh. Setu perak eo ret kbunnariñ gwasoc'h-gwashañ. "Kastell ar Grenn-Amzer, e-lec'h ma veze korollet ha frikotet er sal-vras, a-us d'ar c'harc'harioù-kuzh ha d'ar c'hellioù-boureviañ, zo kouezhet en e boull ha vo mui adsavet. N'eus mui, hiziv-an-deiz, pennkristen ebet a garfe dañsal, keit ha ma vefe unan eus e vreudeur o tiwaskañ bourevierezh". (Gi Lafon-Vin nouveau-

meurzh ebrel 1955). Ha koulskoude AMNESTY a zo aon dezhañ e teufe ar bourevierzh da vezañ ur c'hloñved spegus. " Lod eo bremañ eus ar vuhez-zegezh " emezañ. "Ne vo ket tro da virout outañ da vont, hiziv, el lez- ennoù". Arabat eta bezañ kengiriek, dre amlavarded, dre skuizhnezh, dre interest, dre ziskredoù. Setu perak ez eus dlead da herzel ouzh an droug- se. Ar vertuzioù a nerzh-kalon hag a lealded a gemenn dimp ober gant araezoù efedus" pezh a dalvez, e demokratelazh, komz fraezh hag uhel ha lakaat ar vroad dirak hec'h atebegzhioù"(P.H. Simon) Anat eo ez eus un dra hag a seblant pouezañ war ar vourevion : dazwered ar c'hed- vend("réaction de l'opinion")Aon o deus ar vourevion e vefe gouezet pe- tra a reont.

Chom diseblant a vefe eta koulz ha bezañ kenwaller "Daoust ha ne vefemp ket bourevion ar re holl n'hon eus ket miret outo a vezañ bou- reviet ? eme ar pastor Roland de Pury, korreiz 1974. N'eo ket a-walc'h koulskoude diskuliañ ar bourevierezh evit ma ne vefe mui anezhañ. Ret eo kaout ur steuñv oberiañ, reiñ lañs d'ul luskad o vont war-gresk dalc'h -mat.

AMNESTY INTERNATIONAL zo unan eus al luskadoù-se. Ur genseur- tiezh ez eus dezhi 32 000 ezel, dasparzhet e 60 bro. N'eo ket hepken ur gwazva kelaouiñ, rak reiñ kelou ne vast ket. Ret eo strollañ nerzh- ioù. Ha pa vez oberiet a-gevret, ez eus c'fedusted. Dindan dek vloaz buhez -1962 da 1972- war 4 000 toullbac'had paeroniet gant AMNESTY, 2 000 zo bet dieubet.

Ha petra'ta zo graet gant AMNESTY ?

a)- Dizoleiñ a ra , ur wech graet un enklask ganti anvioù ar re a zo karc'harriet dre ar bed en abeg d'o meizadoù d'var-benn politikerezh, en abeg d'o gouenn pe d'o c'hredennoù.

b) Ober a ra war o zro. Ha d'an ampoent en deus kemeret ar garg eus 3.000 prizoniad. Skrivañ a reer dezho hag a-walc'h eo dezho gouzout e taoler pled outo, evit dezho kaout un abeg da vevañ.

Hag evit se ez eus ur reolenn : dre dri eo strollet izili AMNESTY da blediñ a-unan gant tri zoullbac'had o tennañ o orin eus broadoù a zo dezho ideologiezhoù diforc'h. E Pariz, da skouer, ez eus ur bagadig oc'h ober war-dro ur Paraguaiad, ur Maliad, ur Soviedad.

E Nancy, ur gollig all he deus en em garget eus eus un Turkad, ur Spagnolad, ur Yemenad. Forzh piv a c'hall seveniñ seurt obererezh ; forzh piv a c'hall kemerout ur seurt samm.

k) Termeniñ anvioù an hiniennoù hag an ensavadurioù kiriek d'ar bourevierezh.

d) Ober studiadennoù diwar-benn keindir ar bourevierezh e-keñver kevredigezh, armerzh ha politikerezh ha da heul kas kemennadennoù d'an Ilizoù, d'ar c'hweluniadoù, d'an implijerion ha d'an embregerezhioù, d'ar Wask, da atebion ar stlennañ-yc'h (1) (*"responsables kefridiel, d'al lu ha d'ar gerreizh, d'ar gannaded (des moyens de communication sociale") ha da zerc'houzerion ar bobl.

e) Ober studiadennoù diwar-benn al lezennoù o tevoudañ ar bourevierezh.

f) Ober studiadennoù diwar-benn gweredoù korfel ha breidel ar bourevierezh war ar re a vez sujet dezhañ hag ar perzh kemeret ennañ gant mezeion, a-raok, e-pad ha goude an dalc'hoù-jahinañ.

g) Gwaskañ war ar renerezhioù politikel ; ne reer ket berzh atav; daoust da se e vir Indonezia e rakzalc'h ("détention préventive") 80.000 komunour - hervez kred - bet harzet da geñver taol-stad 1965. Evelato e c'hall oberiadur ar c'hedvenoetrevroadel gwellant stad ar brizonidi en URSS.

h) Goulenn doujañs evit testennoù al lezenn. Gant hogos an holl lezennouriezhoù ez eo berzet ar bourevierezh. Gouarnamant ebet ne gred e arverañ ent kefridiel hag a-c'houez d'an holl. Goulenn a ra eta AMNESTY INTERNATIONAL ma vefe graet hervez an testennoù enskrivet el lezenn.

Ur riskl anat a zo : ar politikelaat. Da skouer, e Bro-C'hall ez eo diaes tre komz eus euzhadurioù an "Diskarzherezh" e 1945. Boureviadurioù a zo bet gant an O.A.S. hogen e izili a zo bet boureviet ivez d'o zro. Tavet e vez war gement-se avat. Pep unan, hervez e soñjoù, a zo damantusoc'h ouzh ur reizhiad ; amañ e vez skoet war Dchecoslovakia, du-se war Vrazil. Hor c'hempredidi ne gavont ket diaes diskuliañ an drouknerzhioù ma vez gwanet ganto o c'heneiled. Pa c'houzañv o enebourion avat e vezont a-du gant ar boureviañ, pe da vihanañ, e chomont sioul ha kenwall a galon.

Embannoù untuek a ziskouez an dra-se bemdez.

Un ensavadur all a zo : LEZVARN VRUSSEL.

An holl izili eus ar stroll-barn anezhi a æ enouestlet e stumm pe stumm er politikerezh hogen krediñ a c'heller n'eus ket tu da varn ar bourevierezh hep ober dave d'ur reizhiad-talvoudoù. Etre an izili a zo lec'hiet a-gleiz ez eus boutin un doare bennak da veizañ an demokratelezh politikel ha keyredigezhel koulz ha gwir ar pobloù d'an emdonkañ, un doare ivez da veizañ ar vuhez etrevroadel a zo enebet ouzh ar broadelouriezhoù hengounel liesseurt hag aloupet. D'ar gristenion eo a-walc'h ober dave d'an talvoudoù kristen.

Da heul AMNESTY INTERNATIONAL a fell dezho harpañ a-hend-all en deus soñjet d'ar gristenion e tleent kaout un ensavadur dezho o unan : OBERIADUR AR GREDOURION A-ENEP D'AR BOUREVIEREZH. Krouet (*) eo bet d'ar 7 a viz Mae 1974. Pal al luskad-se ez eo kelaouiñ ar feizourion d'o broudañ da bediñ ha da oberiañ. An izili, e ser AMNESTY, a sammo ar garg eus prizonidi bolitikel. Rak ur soñjig, ur bedenn, n'int ket bastus, pa lenner Mazhe 25/31-46 : piv eo an toullbac'had ez eus anv anezhañ ? Eveljust n'eo ket ret lavarout e tle an Ilizoù, e-giz Ilizoù, youc'hal pa vez gwasket tud gant tud all.

En diwezh, ar film a zo ivez un duenn da enebiñ ouzh ar bourevierezh. Da skouer : AN ANZAV. Drezañ e laka Costa Gravas war wel an doareoù hag an araezoù m'eo kontammet ganto al levrierezhioù beliezhek ha polisek. Prosez Arzhur London, bez-vaodiern Aferioù diavaez Tchekoslovakia eo a zo an danvez anezhañ. E 1951, e Praha, diwar atiz Stalin, ez eus klasket trouz ouzh ur pemzek rener bennak eus ar Strollad Komunour Tchekoslovakat. Diskred a oa warno dre m'o doa bevet en diavaez eus ar bed komunour, e Bro-C'hall, e Spagn pe en abeg ma oant Yuzevion pe abalamour ma oa bet anavezet ganto anarkourion pe Drotskiourion. E berr, aon a oa o dije ur meizad

(*) "Action des croyants contre la torture" A.C.C.T.

bennak dezho o unan.

Un abardaez, en ur straed didud, ne c'hall mui tangarr Arzhur London mont da du ebet. Tapet eo krog ennañ ; stlapet eo en toull-bac'h. Hag e stager d'e waskañ. Ned a ket re bell an drouknerzhioù ; ur striv kendalc'hus a vo avat evit dispenn e startijenn korf ha spered : diouer a voued, a gouked, dismegañsoù izelaus, kelliou skornet ha mouest, goulennatadennoù adc'hraet hep ehan, gourdrouzioù enep tiegezh ar prizoniad, anzavioù dambrezet tamallidi all, - un dismantradur renet gorrek, reizhiadek, didruezus ; ne oar ket an tamallad zoken petra a damaller dezhañ ; rediet eo avat da anzav : netra muioc'h ! Ar pal nemetañ eo ez anzavfe ! Ha goude bezañ dalc'het penn e-pad mizioù e "komz" London ha sinañ a ra kement anzavadenn a fell d'e vourevion tennañ digantañ.

Bezañ a-nep d'ar brezel a zo ivez un doare da strivañ. "An armoù," eme De Gaulle, "a zispac'h e strad ar c'halonoù fank ar bondougoù gwashañ..." Er barr-uhelañ e vez savet ar muntr ganto ; ganto ivez e vez maget ar gasoni ha dirollet ar gwallc'hoantegezhioù."

An hini a venn flastrañ ar bourevierezh ne c'hall ket bezañ un den"etre" ; betek ar penn pellañ e ranker mont evit diskar an euzhvil : evel ar Jeneral de la Bollardière goude bezañ chomet e-pad tregont vloaz el lu. Setu e gomzoù : "Paz eo bet diarvar evidon e vourevied en Aljeria, n' em eus graet foeltre ker gant va stad. Broudet on bet gant va gwreg he deus lavaret din ne gonte seurt ar pezh a c'hoarvezje gancomp goude..." N'eus muzul bet da zerc'hel dezhañ gant an hini a fell dezhañ mont d'ar gad war an dachenn-se.

"S'or c'hennus eo lakaat urzh en ifern ; war dreuzoù an ifern-se, evel war dreuzoù egile, an hini a asant mont tre ar rank en em zizober diouzh pep goanag..."

Ar c'helenner Rivero, diwar "Les Cahiers de la Pierre-qui-Vire".
1972.)

Ha bremañ ur goulenn a-raok klozañ.

Ha ma c'hoarvezfe warc'hoazh gant unan bennak en em gavout eus tu ar vourevion e c'heller lavarout dezhañ ez eo peure'hrevus ar pezh en dije graet, o tegemer, diouzh ret, e ve skañvaet pouez e wall gant plegennoù zo.

Hogen n'eur ket evit reizhabegañ ar bourevierezh e unan dre amplegoù skañvaus end-eeun; ha n'en deus ket an hini a zo aet da vourev pe en deus lakaet pe lezet re all da vont da vourevion da sevel e glipenn dirak an dud goude-se na da fogasiñ e nep doare evel maz eo techet lod da ober. Arabat eo dezhañ klask en em zidamall dre zidamall ar bourevierezh e unan. Moarvat e vez diaes bepred da unan anzav ez eo kablus. Ha mard eo kristen e rank gouzout "ne c'hall e wall bout pardonot nemet gant an Hini boureviet, kroazstaget ganimp..." Gwell avat ^{da unan} anañvezout e wall eget en em douellañ.

Respont a ray hiniennoù : "Devoudoù ha darvoudoù divoutin a-grenn a c'hellfe va lakaat da derrañ al Lezenn, nann evit va mad-me hogen evit mad ar re all : an "droug disterañ" e c'hellfe bezañ ar bourevierezh e degouezhioù seurt na c'heller ket kavout o c'hen gwazh... neuze e tlefen bezañ treantet gant un doan hag ur c'heuz a yafe betek don va eskern ; hag ar C'hras n'eo ket ur ger aner. Diwar c'hoari gant keal an 'disterañ droug' avat, e ser un 'degouezhoniezh' (*) arvarc e c'heller risklañ diheverz kaer er gwashañ torfedoù..."

En ur glozañ ar brederiadenn-mañ war ar bourevierezh e vefe c'hoazh kalz displegadurioù da ober. Skoet eo bet va spered avat gant un dra : al liamm kreñv a zo dre bourevierezh hag hudurniezh. Bepred e vez diwisket ar c'horfoù, bepred e vezont dornataet, bepred e vez c'hoariet gant an organoù revel, bepred e vez farsadennoù gadal ; h.a. ...

Ya, un "euzhidigezh" ez eo, evel na lavar Julien Roy. "Mallozh," eme Habakuk, an diouganer hebraek, ouzhpenn daou vilved zo, "d'an hini a sav ur gêr e-barzh ar gwad hag a a z i a z e z ur g e o d e d w a r a n t o r f e d . . . "

Y o u e n n T R O A L

Gouere-Eost 1974

=====

G O U R F E N N S K R I D

Adkemer a ran er gourfennskrid-mañ un nebeut mennoziou am eus damveret er ralskrid.


Anat eo e c'hellfe U.A.B.U. ("Urzhidur ar Broadoù Unanet") c'hoari ur roll diveezel a-bouez war-bouez diskarzhañ eus e greiz an izili anezhañ a ra gant ar bourevierezh : a-walc'h e vefe dezhañ kas bodadoù-enklask da c'hwiliañ a-zivout ar mac'herezh politikel dre vras er miezoù maz eus diskred war rno ober gant ar jahinerezh. Gwiriañ a renker ne ra ket ha ne ziskouez ket zoken an disterañ youl d'henn ober. A se c'heller dastum pe ez eo U.A.B.U. dall, mut ha di-c'halloud pe ez eus anezhañ ur c'hevredad gansterion o vezañ ma ra an darn-vuiañ eus e izili gant ar bourevierezh. Souezhet ez eur eta pa weler ur Pab oc'h aotren d'ur seurt kevredad un doujusted bennak war-bouez prezeg dirak ur vodadeg amparet evit ul lodenn vat gant jahinerion.

Kemendall a c'heller soñjal diwar-benn ar renerion stad a aotre doujusted ivez d'ar miezoù bourevier dre ober kenwerzh ha skoulmañ marc'hadoù ganto. Dacust ha n'eo ket aet levier ur gouarnamant kornogat nevez zo da ober al lez d'ur rener stad eus Azia greiz brudet evit aotren implij ar bourevierezh evit ober aferioù mat ganteñ, e-giz un tamm beajour-kenwerzh gwallseven : padal, an dud doujus a bleustr ar jahinerion a ro doujusted dezho pe, kentoc'h, a goll o hini-int o unan. Siwazh, hevelep pleustrezhioù a c'hoarvez re alies gant renerion ar miezoù kornogat ha pa vez anv a werzhañ armoù pe a ober aferioù mat a seurt se ne weler gwech ebet renerion hor broadoù (bet) kristen oc'h ober ar begoù figus, ret eo anzav.

An efedusted armerzhel - lavaromp se diouzhtu - a zo deuet da vezañ ur wir walenn er broioù kevalaour. Brazil, da skouer, baradoz ar vourevier, evel er Chili a-hend-all, ez aberzher pep tra d'an diorreadur ha d'ar galloud armerzhel

ha disfiziout a reer evel diouzh ar vosenn diouzh ar mennoziou a ro pouez d'an den evel den ha n'eo ket evel kenderc'her. (Lenn er c'heñver-se ur pennad nevez embannet gant ar gelaouenn saoznek "Time" diwar-benn bourreviadur ur pastor amerikan metodistat a damalled ezhañ 'darempredoù fall'). Arabat eo disofjal ez eo an armerzh arm pennañ ar galloud milourel, d.l., ar galloud hepmuiken.

Un evenhiadenn adarre evit echuiñ ha bepred e sigur ar "gwir roman" Daoust ha n'eo ket deuet diskar ar C'hornog er grennamer diouzh adsavidigezh ar Gwir Roman en hor broioù. Istor Roma a zo deuet da vezañ patrom hon holl stadoù mac'hom (kv. giz al lezanvioù roman gant dispac'herion c'hall 1789). Daoust ha n'hor befe ket da zilezel ul latinelezh zo evit distreiñ da vammennoù all ?



KASIT HOC'H ADKOUMANANT EVIT 1975, MAR PLIJ.

Lieskrivet gant ar gelaouenn CPPP 50 015 Ar Renner : Y. Ollivier